



# BRETAGNE

## KRISTENIEN DA VIKEN

### Diskan (Refrain)

D'hor Mamm Zantez Anna,  
D'an itron Varia  
D'hor Zalver benniget  
Ni vo fidel bepred.

1

Ni zo gwir Gristenien  
Krouadurien Doue,  
Savet enn e lezen,  
Enn e zoujans ive.

2

Kristenien, hor baniel  
A zo kroaz hor Zalver  
Ni her zav sounn, uhel,  
Bembez, e peb amzer.

3

Gwech all hon tadou koz  
Brudet 'vit o furnez  
A glaske 'r Baradoz  
Araok bep gwisiegez.

4

Gwerc'hez, hor Mamm zantel  
Roit sikour heb dale ;  
E plegou ho mantel,  
Kuzit hor bugale.

5

E pevar c'horn ar vro  
Neuze, ni holl. Gwerc'hez,  
Betek eur hor maro,  
Ni a gano bemdez.

R. ABJEAN

## AMAN PELL DEUZ AN DROUZ (Pedenn al labourer devot)

Abbé HENRY · A. GOASDOUÉ

### Diskan (Refrain)

Aman pell deuz an drouz  
Hag holl sa far ar bed,  
Ar meziou am c'helenn kerkoulz  
Hag an ha bila doktored.

1

An douar a zoug frouez  
Eost founnus d'ar poañniou  
N'o ro ket d'al leziregez  
N'eus ket bloaveziad hep labour.

2

Me 'wel aman gwenan  
Savet da c'houlou-de  
Va skolia 'reont da gemer poan  
Bemdez harpet war gras Doue.

3

An dour-red hep ehan  
A dreuz ar bokedou  
Ober va dever a dlean  
Hep luia er plijaduriou.

4

Ar gwez bras en havel  
A bep tu vez hejet  
Koueza 'rin ma savan uhel  
Suroc'h eo eur vertuz kuzet.

5

An deliou a jom fresk  
Pa vent stak ouz ar gwez  
Evel deliou dinerz ha bresk  
E kouezin, distag ouz Doue.

6

Ar bokedou a zao  
Hag a zec'h en eun de  
Allas ! ne vevint ket atao  
Me ' gouezo hep dale.

7

Al laboused ñgan  
Meuleudi d'o c'hrouer  
Eveldo 'veulin hep ehan  
Doue va mestr ha va zalver.

8

Pep tra 'vidoc'h eta  
Doue a garante  
Poan, labour ; melkoni ha joa  
Hirio hag epad va buhez.

## KANTIK AR BARADOZ

### Diskan (Refrain)

Jezuz pegen bras eo,  
Plijadur an ene,  
Pa vez e gras Doue,  
Hag en e garante.  
Pa vez e gras Doue,  
Hag en e garante.

1

Berr 'kavan an amzer  
Hag ar poanniou dister,  
O sonjal deiz ha noz  
E gloâr ar baradoz.

2

Pa zellan en nenvo  
Etrezek va gwir vro  
Ni jal di a garfen  
Evel eur goulmik wenn.

3

Pa vo pred ar maro  
Neuze me gimiado  
Diouz ar c'hig ankenius  
Enebour da Jezuz.

4

Gortoz a ran gant joâ  
An termen diweza :  
Mall am eus da wellet  
Jezuz va Gwir bried.

5

Aet pell diouz an douar,  
Traopien leun a c'hlac'har,  
Neuze me ray eur zell  
Ouz va bro Breiz-Izel.

6

Doriou ar baradoz  
Digor ouz va gortoz,  
Ar zent, ar zentezed,  
Deut d'am digemeret.

7

Me a welo Jezuz,  
En eur c'hiz dudius,  
O lakat war va fenn  
Ar gaera kurunenn.

8

Kaer e vezo gwelet  
Ar werc'hez benniget  
Gant daouzek steredenn  
A ra e c'hurunenn.

9

Eurusted hep e far  
Sonjal ennoc'h me gar,  
C'houi ro nerz d'am c'halon  
Pa gouez anken Warnon.